




TALABAO

ar gazetenn a ra trouz!



TALABAO, KAZETENN AR VREZHONEGERIEN YAOUANK
ISSN 0982-8311 - CPPAP 69032



24,00 L

Pesk Ebrel...



TALABAO, embannet gant AN HERE
 Kazetenn ar vrezhonegerien yaouank
 ISSN 0982-8311 - CPPAP 69032



Rener ar gazetenn: Alan DİPODE
 © Copyright evit an holl bennadoù
 ha tresadennoù gant AN HERE, 1988

Niverenn 8
 Meurzh/Ebrel 1988

TAOLENN

Pesk Ebrel	2	Alan Dipode
Pêronig	4	Fañc'h An Uhel/Veig/Martial Menard
C'hoariomp...	14	Brieg Ar Menn/Martial Menard/A. Dipode
Kontreadenn er stergann	15	Yanna Seubil/Divi Kervella
An torr-penn	27	Brieg Ar Menn/Alan Dipode
An droug-hirnez	28	Kervarker/Serj Toulgoad/Alan Dipode
Marsel Tapiv, enklasker	32	Tudual Huon
Ur sell war hon Istor	34	Lukian Kergoad/Alan Dipode
Abgregor	38	Mark Kerrain/Alan Dipode
Diskoulm ar c'hoarioù	39	Tarzhig

Maketenniñ ha pajennadiriñ gant Alan Dipode
 "An droug-hirnez" tennet eus ar BARZHAZ-BREIZH, skeudennet gant Toul ha dornskrivet gant A. Dipode

MAR FELL DEOC'H KENLABOURAT GANEOMP...

... Grit evel-mañ: kasit ho tanvez da DALABAO a-raok devezh kentañ ar miz kent an embann (01/04/88 evit an niverenn a zeu). Aesoc'h 'vo evit kempenn ar gazetenn! Ment ar bannoù-treset a rank bezañ 18x24 cm, pe 27x36 cm. Aesoc'h e vo evit ar mouller, ha marc'hadmatoc'h evidomp! Setu tout. Tapit ho pluennoù hag ho kreionoù!

TARZBIG

Arabat didroc'hañ TALABAO! Gwelloc'h eo adskrivañ ar baperenn a gavot amañ-dindan!

Ma c'houlmanantit da dTALABAO, pa c'hourc'hemennan! Ra bado ar c'houlmanant:

1 bloavezh (120 L) 1 bloavezh, koulmanant skoazell (adalek 150 L)

ANV _____ Anv bihan _____

Chomlec'h _____ kêr _____

(Kargit ho c'hekenn en anv AN HERE, hag he c'hasit da: TALABAO, hent-dall Kergelenn, 29112 LAMOUDAL)



Daout
pela'h en-ma
aman'ez?
Da zivall
am'ez

MA BEP GNECH PA DREME
E-BOU AR GAMBR A OA DIFENNET
OUTAN DA ZIGERIN E LARE
DEZHAÑ E-UNAN:

Daout netra
a 40 ar'ez

PA VOE BET ENO
EIZH DEZ EVEL-SE
E OA ENOET MAT
HAG E TIGORAS
AR GAMBR DIFENNET



MA WELAS ENNI UR
MARCH KEN TREUT
PE EN DEVOA POAH
O GICH WAK E ZIGERER

Yev'ez
pela'h en-ma
aman'ez?

MA VOESOUZHZHET
MAT NEUZE O
KLEVET AR MARCH
O KOMZ EVEL-HENN

Ne a zela ar sant
boud a zebra-te
vez. Te n'ouga
bet pela'h ez out
aman'ez

Ar briser, kae he deus da
regaset aman eo m'etrez an
holl sotserozed. Ege a zo
aman pell a zo dale'het
gant dindan gazelge, ha
te, ma me garez diwall,
a c'hoarvez gant evel
ganun....




ha kalz a re all
a zo aman.

Ebet koulskoude mar
karez sentin ouzho
hag ober evel ma
lavin dit, e teump
marteze a-benn
d'en em dennañ
ac'hann.

Ma! met
hastomp buan
neuze!


Ma me c'hoarvez
bet gwel, lavit
din petra a zo
net da ober
evit te



Keuze e vidi un dogez
bras a zo aze e-tal an ma
Koulskot eo bremañ

Degas gant ge c'hilhoi
hag ar voualc'h acur.

Korzh c'hoazh da gambr
ar briser, ha degas gant
ul korrig ruz, a well
eno gant al kor-se e
teump a-benn aus hon
laot.



PIGN BREMAÑ WAR
MA C'HEIN HA
DEOMP KUIT D'AN
DAOLAMM RUZ
RAK AN DOGEZ A DORRO
E CHADENN HAG
A ZEUIO WAR
HOL LERCH,
EME AR MARCH



«An dogez eo! Dre mezh
al leviç, ra vo amañ
ur fanteun ha du xanig
e-barzh!»

«Pelec'h ar foell
int-i aet?
otman e oant
koulskoude...»


«Ha mallozh!»



DRE NERZH AL
LEVR RUZ, RA
SAVO AMAN
UR CHAPEL HA
RA VIMP TROET
E DAOLU SAINT,
A LAVAR AR
MARC'H

ERRUOUT A RA IVEZ
ARSORSEREZ KOZH,
HAG HI FULORET
KLASK A RA, NE GAV
NETRA
DISTREIN A RA D'AR
GER EN UR YUDAL

VEIG 16



Pouk' huzun!
stet eo kuit ganto
ma levr ruz

Mga erruont on tu
all, d'ar stêr pe m
bo ken gallout
ebet warno!

VEIG 17

SETU-INT E-MAEZ
A ZOUAR AR SORSEREZ
KOZH
N'HE DEUS KEN GALLOUD
EBET WARNO!



Ma mallozh warnout,
Peronig ebet garit
ma lebr lehan truz
ha gantañ, ma koll
c'halloud!

BREMAÑ E VO RET DIT MA
LAZHAÑ, EME AR MARCH.

LAZHAÑ A RA PÉRONIG
E VARCH
HA SOUEZHET -BRAS EO
O WELET UR PRINS KAER
O SEVEL ANECHAN.

Ma lennozh dit, Peronig
bra sabet ac'h eus, ha
kaby a re all.



Ne a zo mat
da rade turkia,
deus garun

Trugarez, hoant am eus
da vab bro a rade

HA KIMIADIN A REJONT
AN EIL DIOZH EGILE

schw

C'hoariomp...

Stn azen & an tarv

Penaos e c'hello an azen mont da salu-
diñ an tarv?

O vont eus ur ger d'egile, evel-just,
met dre ma n'eus usmet ul lizherenn di-
fere'h etre ar ger emao'h warnañ hag
ar ger ez it d'e gaout.

Da skouer: TRAP - TARV a zo aotreet
LAOU - UHEL n'eo ket.

AZEN	NAER	MENT	DENT	DONT	DOUR
NOAZ	NEUZ	LAER	AVEL	AVAL	BALE
TEUZ	BOAZ	EVEL	TAER	LAOU	ATAV
BEUZ	TOAZ	DORN	UVEL	UHEL	KAOL
TOAL	KEUZ	FORN	LEUN	TAOL	TEOD
REUZ	KORN	LEAN	REUT	LEUR	PEUL
PESK	NAER	KARV	SETU	BARV	TRAP
GANT	ISTR	BRAN	BRAS	MARV	TARV

Divinadell


Ouzh an daol ez eus asaset 5 kemener,
hag er billig ez eus 5 dluzenn.

Pep kemener a gemer ur pesk, ha kouls-
koude e chom unan er billig!
Ha posubl eo?



AARRGH! SIFROÙ !!!


Leugnit ar c'helic'hioù gant pep sifr
eus 1 betek 9 evit ma vefe hollad pep
tu an tric'horn kevatal da 20!



AL LIZHERENN-SIL, PE AR SILIZHERENN

Anavezout a rit bremañ reolenn ar silizherenn (gwelet TALABAO 4!). Bes' ho peus
hisiv da sibab etre an teir silizherenn-mañ: P, K, L. Chañs vat deoc'h!

Ar silizherenn



DIELL

Piv n'eo bet biskoazh holet, da geñver ur valeadenn a-fed-noz, gant kaerder ar stergann? Piv n'eo bet
biskoazh strobinellet gant ar volz teñval-se, poentoù a-vil-vern o sirinkellikat-enñ?

Piv avat n'en deus ket kollet kalon o klask digejañ an eufi (ar poultr) aour-se? Penaos kavout penn
enne? Penaos diskoachañ an denennoù hag ar skeudennoù a zo ouzh o ober?

An oabl-stered zo ennañ 88 steredeg, en o zouez un tri-ugent bennak a c'heller arvestiñ oute e Breizh etre
daou benn ar bloaz. Hogen gwezh ebet ne weler muiget div zousennad dioute war un drol! A-walc'h e vezo dit
deskiñ an tregont steredeg pennañ evit kaout un alberz mat eus an oabl-stered. Emvoazañ a ri ouzh div pe
deir bep tro, hag e c'hoarvezo ar burzhud...

Kantreadenn dre ar Stergann

gant Yanna Seubil-Kernaodour



M31, stergoumoulienn droellennek Escot



— Steredennoù, lagadoù entanet
O tialvenniñ an eil d'eben,
Galvadennoù karantezus
Hag hopadennoù tridus.
Perak ennoc'h kement a levenez?

— Ni zo e kreiz an noz
Blenierezed ar re gollet
Galvarezed d'ur vuhez leun.
(...)

Maodez Glanndour "Stered"




Un nebeud alioù da zigentañ: dibab, kement ha ma c'helli, un oabl dilatar ha digoumoul-kaer; bez soñj ivez e tamteuz ar stered gwanañ pa vez kann al loar!

Gorto ur c'hardeur bennak, amzer da'z taoulagad d'en em ober ouzh an amc'houlou, da'z maboù-lagad da frankaat, ha hiviziken, laka evezh da chom hep sellet ouzh kement tra e c'hellfe da drellañ (gouleier kirri-tan, prenestroù skléri-jennet, kleuzeuraouegi...). Ma rez gant ur lamp-c'hodell da sellet ouzh ur gartenn-oabl, mouch 'ta anezhi gant ur werenn pe gant un tamm danvez ruz.

Bezañ ez eus un doare eeun d'en em lechiañ hep nadoez-vez, a-drugarez d'an anavezetañ strollad stered: **Karr Arzhur**, ul linenn o tremen dre e ziv rod a-dreñv, enni pemp gwezh ar pellder etre an div rod-se, a gaso ac'hanout betek ar Sterenn a verk an norzh, penn-ahel an neñv (sell ouzh al lon 1). N'eo ket gwall welevus ar steredenn-se; e Breizh emañ un tammig a-us d'ul linenn a-blaen lec'hiet hanter-ent e re an dremmwel hag an neinboent (da

Lun 1



lavaret eo ar poent eus an oabl a zo a-us da'z penn). En em laka a-dal d'ar Sterenn: emañ an norzh rag-enep dit, ar reter ez torn dehou, ar c'hornaoueg ez torn kleiz, hag ar su a-dreñv da gein.


Ouzhpenn merkañ an norzh ez eus eus ar Sterenn ar steredenn nemeti a hañval bezañ diloc'h en oabl; holl ar re all a seblant treiñ en-dro dezhi a-enep kerzhed an orolaj; un dro klok a reont e-korf 23e56mn. C'hoarvezout a ra a gement-se e kemma dremm an oabl hed-ha-hed an noz, a noz da noz, a gouz-bloaz da gouz-bloaz. Evit henn gwiriañ dibab 'ta ur steredenn ha merkañ he lec'h e-keñver ur spislec'h diloc'h — evel un ti pe ur wezenn —; peder munutenn abretoc'h ez adtremino dre aze an noz war-lerc'h (ha div eurvezh ar miz war-lerc'h). Meizañ a ri ivez e c'heller gwelet ar steredegi nes d'ar Sterenn hed-ha-hed ar bloaz, peogwir emaint dal'chmat a-us d'an dremmwel: bezañ e vint uhel pe uheloc'h en oabl; en enep, ar re

☆ steredeg a vez graet eus ur strollad steredennoù, a welomp-ni nes a-walc'h an eil ouzh eben, hag a seblant tresañ en oabl ur skeudenn bennak. Ur ger skiantel eo "steredeg"; an dud a ra kentoc'h gant ar ger "kastell" rak kavout a rae dezhe ez eo skeudennoù kastell a dres ar stered (gwelet "Kastell Karr Kamm", "KerDual" — anv kastell Arzhur — hag all).

★ a holl viskoazh o deus gwelet an dud skeudennoù en oabl-stered. Displeget e vo war-lerc'h pep steredeg studiet eus pelec'h e teu hec'h anv. Pep pobl a wel traoù disheñvel en oabl, ha pep koulz amzer, ivez. Da skwer, Karr Arzhur zo evidomp ur c'horr, an arzh, seizh ejen pe c'hoazh an arar; evit pobloù all e c'hell bezañ tud, doueed hag all. Tud hon amzer a vez techet kentoc'h da welet ur gasteledenn er skeudenn-se...

Diouzh mojennoù kozh ar pobloù e teu peurliesañ an anvioù-se. Eus mojennoù kozh Preden (da lavaret eo Breizh Veur a-raok ma tivroas ar Vretoned d'an Arvor) hag eus mojennoù an Daol-Grenn (Istor Arzhur, Marzhin hag all) e teu dimp al lodenn vrasañ.

Ar stered o deus, evel al loened hag ar plant, an anv skiantel, tenet alies eus al latin, ar gresianeg pe an arabeg. E fin an diell-mañ e kavi ar roll eus an anvioù-se a-dal d'o anv brezhonek.



Lun 2: Steredegi troahelek
KARR AHEZ
KASTELL KARR KAMM
AN DRAGON
AR MORGAZH

bellañ (ar re niverusañ) a c'hoarvezo gante mont diwar-wel dindan an dremmwel; o gwelet a reor o sevel er reter, o treuziñ an ebr en ur dreñv en-dro d'ar Sterenn, hag o vont a-guzh goude er c'hornaoueg; mizvezhiennoù e vint aes pe aesoc'h da ziazelet.

Ret dit gouzout ez eo lodek hon heol (hag e nav flianedenn) er stergoumoulenn anvet an **Hent Gwenn** (pe **Hent sant Jalm** pe **Chadenn Lou**), dezhi stumm ur grampouezhenn bolzennek he c'hreiz ha tanav he zrobarzh. Pa vez sklaer-tre an noz e c'heller he gwelet dre an troc'h anezhi, dindan stumm ur seizenn c'houlou dispis a-walc'h he bevennoù o treuziñ an oabl: ac'hane hec'h anv a "Hent Gwenn".

Stagomp 'ta neuze bremañ gant hon c'hantredenn ha chomomp da zigentañ en-dro d'ar Sterenn, e-touez ar steredegi troahelek...

☆ planedenn: korf, hep sklérjonn dezhañ, a red en-dro d'un heol: an douar zo ur blianedenn, troc'h a ra en-dro d'an heol.

☆ stergoumoulenn: strollad milionoù ha milionoù a stered. An heol a zo e penn diavaez ur stergoumoulenn anvet an Hent Gwenn. Miliadoù a stergoumoulennoù a gaver en hollved.

☆ steredeg troahelek: graet e vez steredegi troahelek eus ar steredegi a gaver en-dro d'ar Sterenn. Ar steredegi-se a seblant bezañ a-us da bennabel norzh an douar.

★ Hent sant Jalm pe Hent sant Jakez a vez anvet rak diskouez a rae an hent a gase da Sant Jakez Kompostella, ur

pire' hirinaj brudet-kenan e-pad ar Grennamer (notenn, stilia = steredenn e latin).

1) **Karr-Arzhur** (pe **ar Seizh Ejen**) zo seizh steredenn ouzh e ober: an div rod a-dreñv (o deus hon skoazellet evit kavout ar Sterenn hag an norzh), an div rod a-raok hag an tri marc'h (**ar marc'h-ambilh** en o fenn, **ar marc'h-tirleur** da eil hag **ar marc'h-leur** da drede). Tost kichen ar marc'h-tirleur e kaver ar **blenier**, ur steredenn vihanoc'h, displann a-walc'h ar gouloù diouti, na weli nemet ma'z peus ur gwelet mat; graet e veze ganti gwezhall evit prouata spister daoulagad an dud. **Karr Arzhur** n'eus ket ur steredeg anezhañ; lodek eo en ur steredeg vras anvet **Kastell Karr Bras**.

★ Anv roue meur ar Vretoned zo bet roet da steredeg vudeiañ an oabl. N'eo ket ur souezh, en anv "Arzhur" e kaver ar ger "Arzh" ha hañval-kaer eo e gwirionez ouzh al loen kreñv a anavezomp. E draioù-kaer a c'heller lenn e «Romantou an Daol-Grenn».



2) **Karr Ahez** (pe **Karr Kamm Bihan**) zo dambañval ouzh **Karr-Arzhur**, petra bennak ma'z eo hemañ brasoc'h ha gwelevusoc'h. Emañ ar **Sterenn** ouzh e laz (pe e beler). Da evezhiañ n'he deus ket ar **Sterenn** merket an norzh a-hed ar wezh: 400 vloaz zo e oa **Iz** (anvet ivez **Sterenn gozh**), anezhi steredenn skedusañ **Karr Ahez**, an hini a rae.


3) **An Dragon** (pe **Avank Du**) zo anezhañ ur vras a steredeg amspenn a c'helli arvestiñ outi mat-tre adak diwezh miz Mae betek deroù miz Du. E lost a zisrann **Karr Arzhur** a-ziozh **Karr Ahez**. Unan eus e steredennoù, **Eflamm** hec'h anv, lec'hiet etre **Iz** hag ar **March-tirleur** he deus diskouezet an norzh 4.000 bloaz zo hag henn gray en-dro a-benn 20.000 bloaz.

Arabat dit kammgamer penn an **Dragon** evit **Karr Ahez** hag a zo brasoc'h ha realiekoc'h.
 * **Uter Penndragon**, tad **Arzhur**, en deus roet e anv d'ar steredeg-mañ. loen-arwez **Arzhur** eo ivez.
 ** **Ar c'heur**, gwelet pelloc'h, en deus lakaet seizh ejen da sachañ war ur c'harr (**Karr Arzhur**), hemañ o vevañ stag ouzh an avank du, evit ma teufe er-maez eus an douar dour nevez. Siwazh ur c'harr all (**Karr Ahez** — **Ahez** = priñsez **Kêr Iz**) a sach war an tu all ha setu perak e voe bezet **Kêr Iz**. Setu penaos e tispleg hon hendadoù perak e cheñch plas pennañ a-hed an norzh etre ar **C'harr Bihan** hag an **Dragon**.

4) **Lez Don** a gavi e beg ul linenn o vont diouzh rod ar-raok **Karr Arzhur** (an hini nesañ d'ar **March-tirleur**), o tremen dre ziv rod a-dreñv **Karr Arzhur** e kavi anezhi en tu-hont d'ar **Sterenn** (gw. p.20-21).
 * **Strobineller** e oa hemañ ha kuzulier-meur **Arzhur**. Ur steredoniour hag ur steredour ampart e oa. Gellout a reer divinañ e dog e skeudenn ar steredeg.

6) **Ninian** zo ur steredeg amspenn ivez a ziaweler peurgelket etre miz Du ha miz Meurzh (gw. p.20).
 * Un douez eus an douroù eo hemañ. Deskañez **Marzhin** e

Ur skeudenn gozh o tiskouez an **Arzh** (**Karr Arzhur**) hag ar **Bugul** (**KerDudwal**) o tiwall anezhañ



Lez Don zo lodek en **Hent Gwenn** hag a ves uhel en oabl e-tro diwezh an diskar-amzer pe deroù ar goañv.

* **Don** zo un douez kozh. *Mamm ur meuriad a aloubas Iwerzhon ha Kornoaeg Europa ez eo. He bugale o deus roet, i ivez, o anv da veur a steredenn. Er «Mabinogion», un dastumad mojennoù kozh eus Kembre, e c'heller lenn troioù-kaer an holl dud-se.*

5) **Marzhin** zo ur steredeg amspenn a-walc'h enni un ugent bennak a stered. Ma trezeul ul linenn o tremen dre ziv rod a-dreñv **Karr Arzhur** e kavi anezhi en tu-hont d'ar **Sterenn** (gw. p.20-21).

* **Strobineller** e oa hemañ ha kuzulier-meur **Arzhur**. Ur steredoniour hag ur steredour ampart e oa. Gellout a reer divinañ e dog e skeudenn ar steredeg.

6) **Ninian** zo ur steredeg amspenn ivez a ziaweler peurgelket etre miz Du ha miz Meurzh (gw. p.20).
 * Un douez eus an douroù eo hemañ. Deskañez **Marzhin** e

Na kaer eo sellet ouzh an oabl stergannek...



??



Dit



8) **Ar C'hon Hemolc'h** zo div steredenn anezhe; emaint dindan gouzoug arzh ar **C'hastell Karr Kamm Bras**; **Kaval** a reer eus an hini welevusañ dioute.
 * **Kaval**, ki **Arzhur** eo en deus roet e anv d'ar steredenn diwezhañ-mañ.

9) **Ar Morgazh** (al **Lev** pe **Leon**) zo ur vras a steredeg hañval ouzh ul leon enni un tregont steredenn bennak; teir anezhe zo goulou-kenan hag ar **Rouanesig** a reer eus an hini welevusañ; aes e vo dit kavout ar steredenn-se pa vo ar **Morgazh** uhel en oabl (etre miz C'hwevrer ha miz Mezheven) dre dresañ ul linenn adalek rodoù a-dreñv **Karr Arzhur** dre bavioù arzh **Kastell Karr Bras**; div wezh gwelevusoc'h eo eget ar **Sterenn** ha glasswenn he gulin, bezañ e c'hall bezañ damguzhet gant al loar pe gant planedennoù dre m'emañ war ar c'helc'h-trova. Penn ar-raok al leon a vez graet ar **Falz** anezhañ a-wezhioù; beg e lost zo **Palou**, ur steredenn a **Strinkvaen** ar **Werc'hez** (n-gvet gant **Mazh**, **Gowenn** ha **Kaval**).

* **Ar Gellid** n'anavezet ket al **Leon** — ul loen eus ar broioù tonn —, ar c'hazh gouez, tost kar dezhañ, a gemeras e blas. Anv ar steredeg-mañ n'eus eta neta dre welet gant al loen a vev er mor (anvet ivez souenna). Ur gwir gazh eo ar **Morgazh** (ur bistig a ra minioñ) ha bevañ ara er mor! Biskoazh kemend-all! Unan eus ar "morgithier" — se a zo anavezet dindan an anv a "Palou" — a zo ivez anv ur steredenn —. Taolet e oa bet er mor pa c'hanas ha deuet e oa da vevañ ur c'hazh divent ha zee da blantañ freuz ha reuz war arvor an div Vreizh (Breizh Vihan ha Breizh Veur). En e veaj vurzhudus en em gavas **Brandan** gantañ ivez.



Palou, ar Morgazh



Ma anv din a zo **Marzhin** **Marzhin** ar strobineller **Sors**er ha muzikaner


Ha me a oar c'hoari gant al loar
 Al loar hag ar stered
 Ar c'houlmoul hag al laboused

Yon Gouez

oa. Goude bezañ desket pep tra digantañ e voc'has **Marzhin** en ur "c'harc'har aer".

7) **Kastell Karr Bras**: lennet ez teus uheloc'h e oa **Karr Arzhur** ur rann eus ar steredeg vras-se a c'heller keñveriañ ouzh un arzh war e grabanoù; an tri marc'h a rafe e benn, ar peder rod ur meni dibr war e gein ha tri c'houlblad stered e bavioù.

Lun 3




10) **KerDudwal** (pe **KerDual**) zo anezhi unan eus ar steredegi anavezet abaoe ar muiañ a amzer. Merkañ a ri **Mazh** (anvet c'hoazh ar **Bugul**) anezhi ar pevare gwelevusañ steredenn, orañjez he goulou; e-tro diwezh an nevez-amzer ez eo ar steredenn gentañ a weler goude ar c'huzh-heol. Evit he c'havout, kendalc'h 'ta gant gwalc'h-gelc'h tri marc'h **Karr Arzhur**.


* **KerDual** eo anv **Kastell Arzhur**. **Mazh** (**AbMazhanou**) a oa-ñ un iski a roue. Ur rann ha n'helle ket bevañ hep na vije e dreid e barlenn ur werc'hez an hini e oa! (emañ steredeg ar **Werc'hez** dres dindanañ).
 ** Anves e ivez ar steredenn-se ar **Bugul**, rak seblantout a ra bezañ o tiwall an **Arzh** (**Karr Arzhur**).



STEREDEGI HA STERED PENNAÑ A C'HELLER GWELET E-PAD AN NEVEZ-AMZER




STEREDEGI HA STERED PENNAÑ A C'HELLER GWELET E-PAD AN HAÑV




Evit ma c'hellfes boazan aesoc'h ouzh "douaroniezh" an oabl, setu amañ kartennoù an oabl evit ar pevar amzer.
Diouzh un tu e kavi ar gartenn-oabl pa seller ouzh tu an norzh, diouzh an tu all e kavi ar gartenn-oabl pa seller ouzh tu ar su.
Ar groaz a verk an neinboet (da lavaret eo ar poent a zo a-us da'z penn).
Ar gartenn a ro lec'h ar steredegi war-dro 10 eur noz (pa vez eur ar goañv), ha war-dro 11 eur noz (pa vez eur an hañv).



STEREDEGI HA STERED PENNAÑ A C'HELLER GWELET E-PAD AN DISKAR-AMZER




STEREDEGI HA STERED PENNAÑ A C'HELLER GWELET E-PAD AR GOAÑV



Ken glan ha ma'z eo an aec e weler miliadoù a stered en oabl.
Klask a reomp ar re a anavezomp:
Ar C'harr Kamm bras hag an hini bihan, ar Stered, ar Yar Wenn hag hec'h evned, ar Rastell.
Hent Sant Jakez hag all.

(...)

Jakez Konan "O'vonet da Lenn ar C'hlijin"



11) **Arc'hanrod** zo ur steredeg vihan met kaer, hañval ouzh un taled, en he c'heuz **Klerwi**; emañ tri marc'h **Karr Arzhur** durc'haet etrezek enni en tu-hont da **GerDudwal**.
 Etre miz Ebrel ha miz Eost emañ **KerDudwal** hag **Arc'hanrod** en o hewelañ.
 * *Merc'h da zDon e oa Arc'hanrod (talvezout a ra hec'h anv kement ha "Rod Arc'han")*. Ur gaer a briñsez e oa-hi. Kinnig a reas kemer plas Gowenn evit dougen treid *Mazh* en he barienn. Pried hemañ e voe ivez.

12) **An Deleñn** zo ur steredeg vihan hañval ouzh un delenn dezhi div godenn. War unan anezhe e verki an **Awen**, pempet gwelevusañ steredenn, glaswenn he liv hag a c'heller spiselec'hiañ a-drugarez da benn an **Dragon** a zo bannet etrezek enni.
 Hewel e vez bemnoz, etre miz Mae ha miz Du pergen; a-vec'h ma spin an dremmwel p'emañ en hec'h izelañ; an **Awen** a ziskouezo an norzh a-benn 12.000 bloaz.
 * *Telenn mestri ar varzhed, da lavaret eo Marzhin, ez eo.*


13) **An Alarc'h** (pe **ar Groaz**) zo ur steredeg kaer-meurbet hañval ouzh un alarc'h o plavañ a-hed an **Hent Gwenn**. E gavout a ri dre astenn ul linenn adalek div rod a-raok **Karr Arzhur**, en tu-hont da **Karr Ahez**. **Hez** (lost an alarc'h) zo gwenn-kann ha hewel a-hed ar bloaz. Etre miz Mezheven ha miz Du eo emañ steredeg an **Alarc'h** en he c'haerañ. **Ar Gurunenn** zo unan eus ar c'haerañ **divsterdennoù** a c'heller arvestiñ oute diwar-bouez ur c'hevelluneden.
 * *divsterdennoù*: steredennoù zo a vev daou-ha-daou (evel m'emañ al

Kinniget d'an Hentoù Gwenn,
 Petra'ven dit, Sterenn, an deñvaljenn?
 Friedrich Nietzsche

loar gant an douar. An heol, avat, efi zo e-unan-penn.
 * *En enor d'an elerc'h a segas an doueed war an douar eo bet anvet ar steredeg-mañ. Kannaded dreist-naturel ar garantez int ivez. Edont o chom gant ar bouidged en Hez.*

14) **An Erer** zo ur steredeg vrag-tre a laka da soñjal e-barzh un erer o nijal, dispalc'e zivaskell gantañ, war arbenn d'an **Alarc'h**; hañvalout a reont bezañ war-nes kenstekañ. Penn an Erer, derc'houezet gant teir steredenn a-steud zo ur merk dispar e-doug an hañv betek deroù an diskar-amzer. **Ere Penwern**, an hini a zo e-kreiz, arvelen e liv, eo an hini welevusañ; bezañ ez eo unan eus ar stered nesañ dimp (goude a an **Denvarc'h** ha **Steredenn ar C'hil**). Ar strollad **Ere Penwern**, **Hez** hag an **Awen** a vez anvet **Tric'horn ar Verdeidi**.
 * *En enor d'an erered a zo karget da blavañ a-us dimp evit danevellañ d'ar rummadoù tud da zont hon istor hag hon doareoù-bevañ eo bet anvet ar strollad stered-mañ. Evel-se eo deuet betek ennomp istorioù marzhus hon hendadoù, a-drugarez da Ere Penwern ha Tuan a zo ar re anavetañ eus an erered-se.*

15) **Ar C'heuz**: diaes eo ar steredeg-mañ da spiselec'hiañ dre ned eo ket gwall lemm ar stered a zo ouzh hec'h ober: klask 'ta hanter-hent etre an **Awen** ha **Klerwi** ur pevarzeg, stumm ur begel-bolz dezhañ. Pa vez sklaer an noz e c'heller gouwelet (s.o. al Lun 6) ur "steredenn" wan ha dispis a zo evit gwir



un druilhad emañ miliadoù ha miliadoù a stered hag a anver **Druilhadr Bras ar C'heuz**. Etre miz Mae ha miz Here emañ ar prantad gwellañ evit arvestiñ ouzh ar **C'heuz**.
 * *Druilhadr*: strollad ur bern stered eus ar memes stergoumouenn, tost-tost an eil d'eben, dreist-holl er c'heuz.
 * *N'ouzer ket re vat peseurt keur (ramz) a zo skeudennet emañ. Gellout a ra bezañ Hu Gadarn a stagas Karr Arzhur ouzh an Dragon evit ma safje un douar nevez. Gellout a ra ivez bezañ ar Morc'haout a voe lazhet gant Drestan (gwelet izeloc'h).*

16) Peder steredenn welevus a-garrez a verzi dibon en oabl; emañ div steredenn ar pezh karrez-se war ul linenn o vont eus ar **Sterenn** trema eil steredenn **W Lez Don**.
 a) **Eseot** hag a zo he fenn unan eus stered ar c'harrez; a-

walc'h eo lec'hiañ an teir steredenn c'houla a ra un tu eus he c'horf hag unan eus he divhar (eben zo stered amsplann ouzh hec'h ober); ur goahrenn amspis a verzi ivez tost-kichen he glin hanter-soublet: ur **stergoumouenn** ez eo kenkoulz hag hon **Hent Gwenn**, enni kantadoù ha kantadoù a viliadoù a heolioù. Aesoc'h e vo dit arvestiñ outi gant ur c'hevelluneden ha kentoc'h etre miz Gwengolo ha miz Genver.
 b) **Marc'h** hañval ouzh ur marc'h askellek a vefe graet e askell d'ic'hornek gant teir steredenn all ar c'harrez (ar bedervet o vezañ penn **Eseot**).

17) E-harz treid **Eseot** emañ **Drestan**, ur steredeg eus an **Hent Gwenn**, enni div steredenn welevus: **Idud** ha **Gorvenal** a argemm al luc'h dioute a-brantadoù.
 Ma'z teus c'hoant gwelet **stered-lostek**, klask kentoc'h e trowardroioù **Drestan** e-doug miz Eost, goude hanternoz.
 * *Stered-lostek* (pe *stered-dared*): ar re-mañ n'int ket stered e gwirionez. N'int ket heolioù. Tammoù mein o kantrel en egor ez int. Pa zeout da drouzilh aerglec'h an douar e vezont devet hag en em zispennont. Ar boaz eo heñviñ un dra bennak pa weler unan anezhe o tremen — amzer ul luc'heñenn — dirsk hon daoulagad.
 * *Istor Drestan hag Eseot (Tristan hag Izold) zo anavezet mat. Unan eus istorioù anavezetañ ar bed ez eo hep mar. Goude bezañ lazhet ar Morc'haout e c'houlenas Drestan digant ar Morc'haout, Eseot, bezañ pried ar roue Marc'h, roue Kernev. War*





an hent eo' h evas, dre zegouezh, an daou zen yaouank un died hud hag e savas ur garantez didrec'hus etreze. Kaer en do Marc'h (hag en deus divskouarn marc'h) ober, ne zeuas ket a-benn d' o adtapout. Setu perak e seblant en oabl Drestan hag Eseo! bezañ diouz an tu ha Marc'h diouz an tu all. Drestan en em redias da zilezel Eseo! goude, setu perak e weler anezhañ en oabl e garantez.

18) E-kichen Drestan e verzi ur steredeg a bouez: **Karr an Ankoù**, enni ur steredenn velen, anvet **ar Saezh**, hogos ken lemm hag an **Awen**, hag a c'heller gwelet a-hod ar bloaz; evit kavout anezhi, astenn 'ta war-dreñv al linenn a dremen dre rodoù dehoù **Karr Arzhur** (gw. p.20-21).

* *Gant e garr ez a an Ankoù da glask an dud o vervel evit o c'has gant d' ar bed all. Diskouezet e vez bremañ gant ur falc'h, met gwezhall e lazhe an dud gant ur saeth. An anv-se zo chomet gant unan eus ar stered a weler er steredeg-mañ.*


19) **Ar Gazez** (pe **ar C'hevelled**), steredeg enni ur ugent bennak a stered, en o zouez **Govanon** (gwenn) hag **Amazhon** (oranjez ha skedusoc'h).

Div hentenn da gavout ar **Gazez**:
— pe dre astenn war-dreñv beskellenn **gKarr Arzhur**;

— pe dre ar warren-gelc'h o tremen dre ar **Saezh**, **Govanon**, **Amazhon**, **Kian** ha steredenn **ar C'hi**. Klasiñ a ra ar **Gazez** an **Hent Gwenn** dre e ziv.

Etre miz Kerzu ha miz Mae e c'heller arvestiñ outi.

* *Govanon hag Amazhon zo daou vreur gevell. Breudeur da Arc'hanrod ez int ha mibien da zDon. Evel ma tiskouez e anv, Govanon zo ur gov, ar gov meur, an hini a ra an armoù sakr. Karget eo ivez da tiskar ar choucheñn sakr d'an dud. Amazhon zo-eti al labourer meur.*



Lun 6 : AR C'HEUR



"Ar C'hi" eo anv steredenn skedusañ an oabl...
Ne gavan ket se sirius...



Dim

20) **Ar C'hi Bihan** zo ur steredeg vihan a ziv steredenn: an eil anezhe, **Kian**, mielen he liv, zo unan eus gwelevusañ stered hon oabl.

Emañ war gwarenn ar **Saezh**; bezañ ez eo ivez unan eus hon amezeged nesañ. Sevel a ra ur eur kent **Steredenn ar C'hi**.

21) **Ar C'hi Bras** zo ur steredeg kaer a-walc'h; sklaer e rank bezañ an noz, avat, evit gellout diawelout ar stered gwanañ anezhi. Evelkent ez eus eus **ar C'hi** gwelevusañ steredenn an oabl. Adalek miz Genver betek miz Meurzh e c'heller bamiñ outi.

22) **Ar Ri (ar Roue)**, anvet ivez **ar Rastell**: ar steredeg dispar-se a c'helli arvestiñ outi etre miz Kerzu ha miz Meurzh. Ne c'hellez ket c'hwitout warni: bezañ emañ ouzh hec'h ober teir steredenn welevus a-steud (war ul linenn) ha tost an eil d'eben [graet e vez anezhe **an Tri Roue** (anvet ivez **Gouriz ar Ri**)] ha div steredenn all gwelevus-

An nerzhioù, n'hell den gouzout nag an anv nag ar stumm anezhe, o deus dishiliet ar Rozenn divarvel. Ha kaer o deus bet ar seizh goulaouenn gouelañ, stouet en o c'horoll, Dragon penn-ahel ar Bed en deus kousket, e walennoù ponner ledet eus an eil islonk d'egile:


Pegoulz 'ta e tihuno ?

(...)

William B. Yeats




Lun 7
AR RI
AR C'HI BIHAN
AR C'HI BRAS
AR C'HEVELLED
KAMMED HEULWENN




AR C'HEVELLED (AR GAZEG)



AR C'HI BIHAN



AR C'HI BRAS



KAMMED HEULWENN

kenan: — **Mabon**, arruz, lec'hiet war harzoù an **Hent Gwenn**, ur **geursteredenn** anezhi (400 gwezh brasoc'h he zrouzket eget hini an heol); — **Riwall**, arc'hlas, **goursteredenn** anezhi peogwir ez eo he zrouzket 33 gwezh brasoc'h eget hini an heol. War gwalenn ar ri (sell ouzh al lun) e verki ur steredenn a hafval bezañ amspisoc'h eget ar re all: **Nivlennad Vras ar Ri** ez eo, anezhi ur goumoullenn aezhenn egorant, danvez 10.000 heol enni!

☆ **keursteredenn**: steredenn bras-tre. He fouez avat n'eo ket ponner-kaer.

☆☆ **goursteredenn**: steredenn bras-tre, met bihanoc'h eget ur geursteredenn (hon heol, eh, zo ur steredenn etre).

* *Skeudenn ur roue-hemolc'her (= chaser) eo ar steredeg dispar-mañ. Kavout a reer e anv evit ar steredenn vrasañ: Mabon.*

★★ *Graet e vez an Tri Roue eus an teir steredenn a zo e-keiz en enor an tri roue a gasas profoù d'ar mabig Jezuz pa c'hanas. Degouezhou a ra mat a-walc'h rak kregiñ a reer d'o gwelet un tamm a-raok an Nedeleg.*

23) Dindan ar Ri ez eus ur steredeg all heneuz a-walc'h anvet **Kammed Heulwenn**.

* *Peder melchonenn wenn a gresk dindan pep pas a ra ar plac'h koant-mañ, Heulwenn. Ar peder steredenn welevusañ a dres merk ar pas-se. Heulwenn he deus roet ivez hec'h anv d'ur steredeg all: Pennad-Blev Heulwenn.*

24) A-gleiz d'ar Ri, etre ar **C'hi Bihan** hag ar **C'hi Bras** menegomp ivez an **Unkorneg**, bras hag amspinn...

☞ Tachad ar Ri zo kaerañ lodenn bolz an neñvoù. Pa vez uhel ar Ri en oabl e c'heller niveriñ seizh steredenn c'houlou en tachad-oabl strizh-mañ: c'hwec'h anezhe a ra ur c'hwec'hkogn (ar **Saezh**, **Amazhon**, **Kian**, **Steredenn ar C'hi**, **Riwall** ha **Ruzan**) hag ar seizhvet, en e greiz, **Mabon**, an hini welevusañ.



ROLL AR STERED GANT AN ANVIOÙ SKIANTEL

Aerouant (an): Hydra	Gwareger (ar): Sagittarius	Kurunenn (ar G.): Albiroo	P'wall: Rigel
Alarzh (an): Cygnus	Gwendez: Aleramin	Lev: Leo	Rod a-dreñv dehoù: Dubhe
Armaezhon: Pollux	Gwener: Venus	Laon: Leo	Rod a-dreñv kleiz: Merak
Archantod: Corona Borealis	Gwerchez (ar W.): Virgo	Lez Don: Cassiopeia	Rod a-rack dehoù: Megrez
Aros (an): Pegasus	Gwerc'heuz: Capricornus	Lifis: Lynx	Rod a-rack kleiz: Phad
Avank Du: Draco	Gwerveven: Zubelgenubi	Loar: Luna	Rouenezig (ar): Regulus
Awen (an): Vega	Gwiz (ar W.): Cancer	Lost Arar: Ursa Major	Roue (ar): Orion
Ball Sant Pêr: Lacteus orbis	Hant Gwenn: Lacteus orbis	Louann (ar): Vulpecula	Roue Pesketaer (ar): Piscis
Bir (ar): Sagitta	Hant Sant Jakez: Lacteus orbis	Mabon: Beteigeuze	Auzennus
Bliener (ar): Alcor	Hant Sant Jaim: Lacteus orbis	Mael Ruz (ar): Antares	Ruskennad (ar): Prasepe
Bouch (ar): Capricornus	Heol: Sol	Maen ar Birvidigezh: Alya	Ruzan: Aldebaran
Bran (ar V.): Corvus	Hez: Deneb	Maen-Fom (ar): Taurus	Sadon: Saturnus
Brandan: Mira	Hoc'h: Aquarius	Maloù: Diphia	Saeth (ar): Capella
Bugul (ar): Arcturus	Iz: Kochab	Merch: Pegasus	Sezh Ejen (ar): Ursa Major
Buorzh (ar): Prasepe	Kammad Heulwenn: Lepus	March-Ambilh: Alkaid	Skuilher Dour (ar): Aquarius
Chadenn Lou: Lacteus orbis	Karr Akaz: Ursa Minor	March-Lour: Alioth	Sitr (ar): Enkidu
Charotar (ar): Alcor	Karr an Anikoù: Auriga	March-Tireur: Mizar	Steredenn al Labourer: Venus
Daoulagad ar Chazh: Shaula- Lesath	Karr Arzhur: Ursa Major	Mazh: Arcturus	Steredenn an Heol: Venus
Donvarzh (an): Ctenatus	Karr (Kamm) Bihan: Ursa Minor	Mentel (ar V.): Libra	Steredenn ar Vartolod:
Dragon (an): Draco	Karr (Kamm) Bras: Ursa Major	Mercher: Mercurius	Polaris
Dreitan: Perseus	Kastell (ar C'h.): Orion	Meurzh: Mars	Sterenn gath: Kochab
Druilhadr bras ar Cheur: M13	Kaval: Cor Caroli	Morgazh: Leo	Taru (an): Taurus
Ebeul (an): Equuleus	Kazeg (ar G.): Gemini	Morhoch: Delphinus	Tarved (an): Prasepe
Eltamm: Thuban	KerDual: Bootes	Norvarzh: Perkhad	Tellenn (an D.): Lyra
Ejen (an): Hyades	KerDudwal: Bootes	Norval: Cetus	Tourzh (an): Aries
Eoged (an): Pisces	KerDudwal: Bootes	Naer (Penn Lost): Serpens	Trichorn (an): Triangulum
Eret (an): Aquila	Keur (ar C'h.): Hercules	(Caput, Cauda)	Tri Roue (an): Alnitak-Alnilam
Eret Perwenn: Altair	Kian: Procyon	Nastatar: Ophiuchus	Mintaka
Esalt: Andromeda	Ki Bihan: Canis Minor	Ninian: Camelopardalis	Unkorneg (an): Monoceros
Even: Algeba	Ki Bras: Canis Major	Nivlennad bras ar Ri: M42	Yacu: Jovis
Gevellod (ar C'h.): Gemini	Kirilaouen: Venus	Palou: Denebola	Yavod-Polkned (ar): Pliades
Glazari (ar): Lacerta	Koeller (ar C'h.): Sculptor	Peliaz: Fornahaut	Yar (arn) (ar): Pleiades
Gonwerel: Algol	Klerw: Alpha Centauri	Pennad-Biv Heulwenn: Coma Berenices	Yar hag he tonned (ar): Pliades
Gouniz ar Ri: Alnitak-Alnilam- Mintaka	Kolen Kazh (ar C'h.): Leo Minor	Peredur: Ophiuchus	Yang (ar): Pliades
Gowanon: Castor	Kon Hemolch: Canes Venatici	Priz Ruz: Antares	
Gowenn: Spica	Krank (ar C'h.): Cancer	Rastel: Alnitak-Alnilam-Mintaka	
Grall (ar): Crater	Kroz (ar G.): Cygnus	Ri (ar): Orion	
	Krug (ar G.): Scorpius		

Hon c'hantredenn dre ar stergann a gendalc'ho en niverenn a zeu (Nnn.9). Studiet e vo steredegi an Arouezkelc'h hag ar planedennoù. Ac'hann di e c'hellez tremen nozvezhoù kaeroc'h arvestin ouzh ar stered hon eus gwelet en dro-mañ...

DIELLOÙ

p.15: Sellva steredoniell Skol-Veur Adelaide (Australia); p.16: Maodez Glendour *Kontoù Bev Al Liamm*1985; p.16: *Le Grand Calendrier et Compend des Bergers* Lyon 1579; p.18: ?; p.19: John Sibbick *Draids, Gods & Heroes from Celtic Mythology* Peter Lowe 1986; Yon Gouez *Marzhin ar Strobolier* SF 11-77-272; John Sibbick op.cit; p.21: Jakez Konan *Lanneveven e Kevn Al Liamm* 1980; p.22: John Sibbick op.cit; William B. Yeats *Selected Poetry* Pan Book 1974

KENLABOUR

Al lodenn istorel, ar c'harterennoù eus an oabl, an dibab testennoù ha skeudennoù, ar stummañ hag al lizherennaouiñ zo bet graet gant Divi Kervella
Trugarez da Herve Seubil-Kernaodour evit e skonell brizius
Trugarez ivez da Yann Bouessel du Bourg, Vedig an Dred, Daniel Giraudon, Goneri Kersaeron, Jakez Konan, Martial Menard, Turlaw ar Menieg.

AN TORR-PENN

TARZHIG E BRO AR VOUBOUKANED



Fellout a ra din skrivañ un diell diwar-benn ar Vouboukaned, un ouern korriganed ispisial-tre: lod anezho ne lavaront nemet ar wirionez, lod all nemet gevier, hag ar re all n'eus ket tu fiziout en o c'homzoù (genaouerien a vez graet diouto). Ret e vo din en em zibab ha chom hep faziñ pa vo graet goulennoù ouzhin, pe e vin debret kriz get ar Vouboukaned!

Me eo Tiern Korriganed Bro-Dardoup!
2 + 2 = 5! 2 + 3 = 6! Unan'd an ne-
beutañ eus ar 4 lavarenn-mañ
a zo faos!

Ur gaouiad a
c'hellfen bout?
Tiern Korriga-
ned Bro-Dardoup
a c'hellfen bout?
Respontit!!

Me 'lâr wirionez, atav!

Me 'zo ur genaoueg,
Lomig 'zo ur gaouiad!

Me 'zo ur gaouiad,
Lomou a lâre ar wirionez, atav!

Ne lâran gwech ebet ar wirionez,
Bogig 'zo ur genaoueg!

N'on ket ur genaoueg,
Bogou a zo ur gaouiad!

N'on ket ur gaouiad,
Bogan a lâre ar wirionez, atav!

N'on ket ur genaoueg,
Bogig a zo ur gaouiad!

Piv 'zo petra? (N'int ket holl
genaouerien)

Aiou!! Diaesoc'h--diaesañ eo an
divinadelloù! Klaskit gant Tarzhig
evit skoasellañ anezhañ, mod all
e vo debret gant ar Vouboukaned!!

Piv a zo petra?

An droug-hirnez

An eorioù zo savet, setu ar flik-ha-flok
Kreñvaat 'ra an avel, mont a reomp kaer a-raok
Stegnañ 'reek ar gouelioù, an douar a óella
Va c'halon, siwazh din! ne ra 'met huanadañ


Kenavo neb am c'har em parrez tro-war-dro
Kenavo dousik paour, Linaiz kenavo
Ar c'himiad ma ran dit, ken evit da zuitaat
Marteze siwazh din, da viken, evit mat.



'Vel un evnig lamet zant ur sparsfell er c'hoad
Deus a-zichen he far pa oant d'en em darat
M'eus ket kalz a amzer da soñjal da'm zlac'har
Ket buan am lamer digant an neb am c'har.

Evel un oan a zen, pellaet deus e vamm,
N'ehanan da ouelañ, da deur'l klemmoù estlamm;
Ma daoulañad bepred troet trezek ar plas
E-lec'h out-te chomet, va mignoneziñ vras.

Pelloc'h va daoulañad ne weljont nemet mor,
A zred a-zindanon, a lamm hag a zigor;
Ha pa'z an da soñjal emañ echuet ganen
Ha me e goueled mor, am strinkañ 'ra dan neñv.








Pa zeuis tre el lestr, va estlamm a oa óras
Zwelet ur seurt kastell o vrallañ wa'k mor zlas;
Devar-uzent kanol, daou-uzent a óep tu
O c'horf órizhiet e zwen, livet zant livaj du

An aod evel ur c'helc'h, en-dro, pell diouzhen,
O kannañ en daou du ar mor óras haç an neñv.
Ha óeçiz ar zwerioù, uheloc'h diouzh an दौर
Ha m'eo diouzh ar vered óeç an uhelañ tour.

Zwel't hoc'h eus war ar roz en-dro d'ar raden zlas,
O deus koulmoù a-walc'h koulz a-hed haç e kroaz,
En-dro d'ur wern ez eus liesoc'h a funenn
Evit a neudenn zo en-dro d'ar radenenn.



Allas! ar Vretoned zo leun a velkoní!
Mevelliñ 'ka ma fenn, ne c'hallan soñjal mui.
Va c'halon a zigor, 'n anek 'ran ar son-mañ;
Marteze, siwazh din! na'm c'hlevfoç he c'hanañ!



Marsel TAPIV, enklasker...



Ur sell war hion Istor

A-raok ar bloaz 900...



LANDEVENNEG

Laoskomp ar gaoz gant an hini en deus skrivet *Buhez Sant Gwennole Konfessor* (1): War Enez-Tibidi emañ ar venec'h.

"Ac'halese e vez gwelet ur c'hoad kner hag en e greiz un draonienn troet d'ar sav-heol. Nemet etrezo e oa, war hed 2 vilmor koulz lavaret, ar mor bras a segoezhe ennañ ar stêr anvet Aon. Diouzh strad an draonienn, bemdez, da c'houloudeiz e save ar vrummenn evel ar moged. Al lec'h-se a seblante bezañ an eürusañ a oa evit kement hini a selle outañ.

N'o doa ken nemet ur mall: bezañ kaset di."

Sant Gwennole

Eus menec'h sant Gwennole (2) e oa kaoz. Hemañ eo en dije savet manati Landevenneg. Mab e oa da Fracant ha Gwenn e oa anv e vamm. Deuet e oa ar re-mañ eus Breizh-Veur evit en em ziazezañ e Breizh-Vihan evel kalz Bretoned d'ar mare-se.

Kaset e voe Gwennole d'ar skol gant Budoc, ur sant manac'h en doa savet e vanati war Enez-Lavreg e-tal Enez-Vriad.

Mont a reas Gwennole da vanac'h d'e dro ha dont a reas, asambles gant un toullad menec'h all, da sevel lochennoù war Enez-Tibidi, e foñs pleg-mor Brest.

"Re ec'h errue an avel eno" a zo bet skrivet. Setu int hag ober o soñj mont d'an tu all eus ar stêr.



(1): E latin: *Vita Sancti Gwinnaloii Confessoris*.

(2): *Winnaloe* e oa Gwennole e henvezhoneg, Brezhoneg a-raok ar bloaz 1100. Dont a ra eus *win* (gweñ, gian) ha *valoe* (kalonek).



"Buhez Sant Gwennole"

War-dro ar bloaz 500 e vije deuet ar venec'h d'en em ziazezañ el lec'h-se, a zo anvet Landevenneg abaoe.

Kontet eo bet an dra-mañ, kalz diwezhatoc'h, gant unan eus ar venec'h a oa er manati? Wrdisten e oa anv hemañ. Abad e oa-eñ, da lavaret eo e oa e pennt an holl venec'h.

E-tro ar bloavezhioù 870-890 en deus skrivet Wrdisten ul levr e latin anvet *Vita Sanctis Winnaloii Cornugallensis*, pezh a dalv *Buhez Sant Gwennole ar C'hornevad*.

War parch e skriv ar venec'h ha gant ur bluenn.

Gant krec'hen deñved, leueoù pe gevred e veze graet ar parch. Setu aze danvez levrioù ar mare-se.



Ur vuhez rust ha kalet



En ul levr-buhez all diwar-benn sant Gwennole e vez kontet peseurt buhez kalet e rene ar sant:

"Ne wiske morse dilhad gloan ha lin, met atav dilhad kroc'hen gavr. Ne gouke morse e-barzh ur gwele pluñv pe danvez, pe plouz soken. E-lec'h pluñv e rae gant klor kistin kalet (...) E-lec'h pennweleoù seiz gwiet gant koton ha lin e veze trawalc'h dezhañ kaout ur maen a bep penn, evit souten e benn ha derc'hel e dreid..."

Mont a reas d'ober kentel d'ar roue Gralon, mestr Kêr-iz, dra ma rene tud kêr ur vuhez re blijadurus. Met ne voe ket selaouet hag an dour-beuz da ouledañ ar gêr gaer... diouzh pezh a lavar ar vojenn da nebeutañ.



Ur vuhez a bedenn

Met penaos e veve ar venec'h da vare Wrdisten. Janeveller *Buhez Sant Gwen-nole?*

Gouestlañ a raent d'ar bedenn ul lodenn vat eus o amzer en ur heuliañ reolenn sant Benead.

Abred-kenañ diouzh ar mintin, a-raok an deiz, e veze ret sevel. Ar c'hilhog eo, gant e gan, a zihune paotr ar c'hleier. Ha brall d'ar re-mañ neuze, ken e tihune an holl venec'h. Mont a raent neuze d'ar chapel evit al "laodez", ofis kentañ an devezh.

Meur a ofis all, oferenñ ha gousperoù, a veze a-hed an devezh. Unan all a veze e-kreiz an noz ivez: sevel a rae ar venec'h war greiz o c'houk evit mont da ganañ "vijilez".



Sant-Iwennole gwisket en abao, o kinniz reolenn Sant Benead (Iliz Gwiklan)

Al labour korf



Tog-kolonenn e Landevenneg (XIV^e K)

Etre an ofisoù e veze prantadoù labour. Evit kaout ur spered yac'h e taole ar venec'h o c'horf d'al labour. Sevel a raent loened evit kaout kig ha laezh. Gant hemañ e veze graet fourmaj.

Ken aketus e rae ar venec'h war-dro o liorzha ma skrive Wrdisten kement-mañ: "Klinket eo al liorzha a bep seurt bleunioù ha reiñ a ra houmañ frouezh n'int ket diwar an douar hepken, met kentoc'h diwar an neñv". Soubenn al legumaj a veze alies er manati eta.

Ar gwenan a roe o mel d'ar venec'h da dalvezout da sukrañ. Reiñ a raent ivez o c'hoar, d'ober goulaouennoù.



Al labour spered

Gant al labour spered e yae al lodenn diwezhañ eus an amzer.

Skrivañ hag adskrivañ a rae ar venec'h a bep seurt levrioù war danvez parch: buhezioù-sant, avielerioù, yezhadurioù, levrioù lezenn, matematik pe medisinerezh...

E latin e veze skrivet kalz: ur 100 levr bennak bet skrivet e Breizh a-raok ar bloaz 900 a vez kavet, strewet du-mañ du-hont dre ar bed.

E brezhoneg e skrive ar venec'h ivez. Div follenn eus ul levr medisinerezh eo ar skrid brezhonek koshañ a zo deuet betek ennomp. Miret eo e Leyde, en Izelvroioù.

N'eo ket souezhus eta eo d'ar manatioù e veze kaset ar re yaouank d'ober studioù d'ar mare-se.



Avieler d'ozskrivet e Landevenneg

Ar manati nevez



Betek dispac'h Bro-C'hall, e 1789, ez eus bet menec'h e manati kozh Landevenneg.

Gwerzhet eo bet ar savadurioù gant ar stad d'ar mare-se. Laosket eo bet ar re-mañ da vont dirapar gant ar ber-c'henned nevez, ken int kouezhet en o foull.

Dismantroù ar manati kozh-se a c'haller gweladenniñ war vord ar stêr-Aon. Un tamm kempenn a zo bet graet dezho.

Abaoe 1955 avat ez eus menec'h adarre e Landevenneg, en ur manati nevez savet un tammig uheloc'h.

Landevenneg a oa *Lantowinnoc* da vare Sant Gwenole. Dont a ra eus *Lann* (manati), *eo* (rakger) ha *Winnoc*, stum b'hanat *Gwenole* (*Winnoc*, *Gwinneg* a d'ar Gweneg).

ABGREGOR

MOR KERRAIN

GREGOR ROC'HKONGAR zo ur skiantour eus ar re souezhusañ: emañ oc'h ober ur robot en deus anvet Abgregor.

Ur skoazellerez en deus a zo anvet Janig. Met Janig ne blij ket dezhañ nemeur: komz a ra kalz, kousket a ra kalz, ha diwezhat e vez bep beure.

- Ha disheñvel e vo Abgregor diouzh an dud all? eme Janig.

- Ya 'vat, speredkoc'h e vo, ha kreñvoc'h e vo ivez.

- Ha petra a zebro?

- Ar memes boued ha ni a zebro, nemet muioc'h ac'h aio gantañ: daou lur vara hag ul litrad kafe da lein.

- Gallout a raio komz?

- Ya, met komz a raio nebeutoc'h egedoc'h, ha kousket a raio nebeutoc'h ivez. Nebeutoc'h a fazioù a raio ha gwelloc'h e labouro. Efedusoc'h egedoc'h e vo!

- Petra a dalvez ar c'homzoù-se, Aotrou Roc'hkongar?

- Janig, Abgregor a vo ma skoazeller nevez. Labourat a raio muioc'h ha kous-tañ a raio nebeutoc'h.

- Ha me, neuze, Aotrou...?

- C'hwit! Tevoc'h oc'h eget an dud all hag Abgregor en do muioc'h a naon eget an dud all... Debrñ a raio ac'hanoc'h!

- Sikour!... Forzh ma buhez!! a huch Janig en ur redek kuit.



(Traet diwar ul levr saozneg 4re klas yezh kentañ, evit adwelet an azen da zont hag ar c'heñveriañ)

C'HOARIOU TALABAO 7

ESTRANJOUR AR GAEL: dourgi - louarn - gwiñver - avalaouer - broc'h - gad - lir - naer - karv - bleiz - mart - mors - minoc'h - kaerell - pudask - reunig - goz - ran touseg - logod - razh - demm - yourc'h. An estrañjour: KAZH.

1000 HENT-DALL: an hent 2. Aes-tre...

AN TORR-PENN: 1/ Ur valsenn. 2/ Ho tad. 3/ Un eurvezh. 4/ Sofjit mat... Pet munutenn a zo e-barzh 1 eurvezh hag 20 munutenn? 5/ Rak faziet eo... 6/ Tregont kilometrad. 7/ Vezañ ma ya ar rederien da 25 Km/eur hag o vezañ ma'z eus 50 Km strezo, kejañ a raint a-benn un eurvezh. Hag o vezañ ma nij ar gelienenn da 30 Km/eur, ne c'hello nijal nemet 30 Km, pegen luziet bennak e c'hellfe bezañ he hent! 7/ Beg ho teod. 8/ Kas daou eus ho mignoned war-un-dro. Ma vefe kaset ur mignon div wech e koustfe karoc'h deoc'h: daou vilhed evitañ ha daou evidoc'h. 9/ Betek 112 metrad!! Un tacl-dreist!! 10/ Ne c'hell ket neuial: mont a ra d'ar strad diouzhtu...

C'HOARIOU TALABAO 8 (Ya, ya! An hini emaooc'h o lenn!)

AN AZEN HAG AN TARV: AZEN-NAER-LAER-AVEL-EVEL-UVEL-LEUN-LEAN-NAER-DRAN-BRAS-BARV-TARV.

DIVINADELL: Unan eus ar gemenerien a zebro e besk er billig, evel-just!

AR SIFROU: 1+7+3+9 = 1+8+6+5 = 9+4+2+5 = 20. AR SILTIZERENN: K.

TARZHIG E BRO AR VOUBOUKANED


DIVINADELL 1: Ne c'hell ket ar Vouboukan bezañ ur gaouiad peogwir e lavar ar wirionez pa lavar ez eus ul lavarenn faos (2+2 = 5, da skwer). Ne c'hell nemet bezañ ur genaoueg, setu e c'hellfe bezañ Tiern Korriganed Bro-Dardoup.

DIVINADELL 2: Ne c'hell ket Lomig lavaret ar wirionez, na bezañ gaouiad, setu ez eo ur genaoueg. Ne c'hell ket Lom lavaret ar wirionez (Lomig n'eo ket ur gaouiad), setu ez eo Lom ur gaouiad ha Lomou a lavar ar wirionez.

DIVINADELL 3: Piv a lavar ar wirionez? Bogou ne ra ket, pe neuze e livfe gevier! Ma lavarfe Bog ar wirionez e vefe Bogou ur gaouiad, ha n'eo ket peogwir ne lavarfe ket ne lavar gwech abet ar wirionez... Ma lavarfe Eugig ar wirionez, e lavarfe Bog anezhi ivez, hag hervezañ ez eo Bogig ur gaouiad: ne c'hell ket bezañ. Ma vefe Bog an hini a lavar ar wirionez e vefe Bogig ur gaouiad, koulskoude e lavarfe ar wirionez oc'h adlavarout e lavar atav Bogig ar wirionez: ne c'hell ket bezañ kennebeut hag HINI EBET NA LAVAR AR WIRIONEZ.

Peogwir n'int ket holl genaousien ez eus d'an nebeutañ ur gaouiad, ha ne c'hell bezañ nemet Bogig, pe a-hend-all e lavarfe ar re all ar wirionez. Bogou, Bog ha Bogan a zo genaouerien.





D'UL LENNER KEVRINUS:

ΘΑΥΤΘΑΘΩ ΛΘΒΛ'Α ΟΥΧΘ ΛΘ ΙΧΘΑΘΑ! ΞΘΣΧΘ ΛΧΘ ΛΘ ΣΘ-
ΡΑΘΛ, ΜΘΑ ΠΘΝΝ ΛΘΒΛ'Α: ΟΜΒΘΠΠΘΘ 'ΥΘ ΓΘΠΘ ΘΑ
ΒΡΘΣΘΠ ΤΙΧΧΘΛΥΑ! Θ·ΛΧΑ·ΓΘΠΘΠ,

ΙΙΧΛΒΛ

TALABAO, embannet gant AN HERE, 16, straed Jules Henriot, Kerdrezeg, 29000 KEMPER. Rener ar gazetenn: Alan DIPODE. Kasit gwerzh ho koumanant da dTALABAO, Hent-dall Kergelenn, 29112 LANDUDAL. 120 Lur ar bloavezh. Koumanant skoazell adalek 150 L. Koumanant evit ar broioù estren: 150 L. Chekenn da vezañ karget en anv AN HERE. Diskleriet hervez al lezenn c'hall Meurzh 1988. Lezenn c'hall 49-956/16-07-49 a-zivout an embannadurioù evit ar yaouankiz. Lakaet er moull e ti gKloatr, mouller e Sant-Tonan, 29220 LANDERNE, Breizh.

© AN HERE, 1988.